

AR GOULOU Gwenn



Kelaouenn *Breizh Vrezhon* niv. 16 Gouhere - Eost 2021 Priz : 3€

Paol Kalvez (1924-2021)

En ospital Naoned eo distroet ene Paol Kalvez da Zoue e-pad an hañv goude bezañ graet e zalaroù e-pad mizvezhioù hir. 97 vloaz e oa. Ur vuhez hir en deus bevet eta. Un den a-bouez-tre eo bet evidon, ur «mentor» war bep tachenn. A-bouez-tre eo bet ivez en Emsav, e stern KEAV, SADED, SKOL AN EMSAV ha KRISTENION BREIZH. Dleet e oa din skrivañ ur ger bennak diwar e benn¹.

E Lokournan-Leon eo bet ganet Paol Kalvez. E dad a oa mañsoner ; un tiegezh pinvidik a-walc'h e oa. E dud a gollas hag-eñ yaouank c'hoazh, d'e zek vloaz. En ur voereb e voe fiziet diwar neuze, a oa brezhonegerz ha kristen-tre. Eveljust e oa bet savet e galleg gant e dud, met dre e voereb en deus bet un darempred a-dost ouzh ar yezh hag ouzh ar feiz ivez, en ur ger ouzh ar Vreizh vrezhonek ha kristen a oa o vont da vat war fallaat dija e-touez tud e rummad, evel m'en diskouez mat istor an Aotrou Perrot, abostol Feiz ha Breizh er vro Leon 'santel'-se².

¹ Lod eus an titouroù a gaver er pennad-mañ a zo tennet diouzh lec'hienn KEAV, diouzh e fichenn Wikipedia, diouzh e levr eñvorennoù «Kamb ar Stered» (skridaozet gant Malo Bouessel Dubourg), ha diouzh ar c'haozeadennoù am eus bet gantañ... e-doug an hanter kant bloavezh diwezhañ eus e vuhez, daoust ma ne gaoze ket kalz diwar e benn e-unan evit gwir.

² Skeudenn ar bajenn : *Emgav Kristenion Breizh e Pornizh d'ar sadorn 26 a viz Here 2013. Paol Kalvez a zo er renk kentañ.*

Goude skol gristen Lokournan, emzivad, e voe kaset diouzhtu e pañsion d'ur c'hloerdi evit ar misionoù e kreiz bro-C'hall ha goude-se e Tunizia. Kontet en deus din e veze taolet pled bras d'an ampoent ouzh ar pezh a lenne ar skolidi. Ur wech en doa kaset gantañ ul levr a gonte istor ur seurt ermit en doa graet tro ar bed e-unan war ur vag. Al levr-mañ, emezañ din, en doa bet ul levezon vras warnañ. Studiañ a reas



evel-se al latin, al lennegezh c'hallek, ar feizoniezh, ar brederouriezh ivez. A-hed e vuhez goude-se e vo un den o prederiañ war bep tachenn. El levrioù en deus roet din ez eus leun a evezhiadennoù, «refleksionoù profitabl» evel ma lavare, a fed troidigezh, diwar-benn darvoudoù kempred e Breizh, en Iliz hag er

bed. Un den en e sav e oa, oc'h arvestiñ ouzh ar bed.

Mont da soudard a rankas ober e 1943 e arme gall Norzh-Afrika. E 1945 e voe disoudardet. Ne voe ket degemeret da vont da visioner avat. Da Vreizh e tistroas ha klask a reas mont da veleg met hep dont a-benn... Er c'hloerdi bras e kejas gant ul lokournanad all, tomm ouzh ar brezhoneg ivez, ar yezhadurour da zont Ronan Ar Glev. O daou e labourjont neuze evit ar BALB (Breuriezh Al Levrioù Brezhonek) bet savet gant Langleiz evit gwerzhañ levrioù war ar maez, o vont war varc'h-houarn. Kement-se ne oa ket ur

«*situasion*» eme dezhañ e voereb. Gant ul lodenn eus e hêrezh en doa prenet neuze ur vag, daoust ma ne ouie ket merdeñ. Ur wech e Sant-Mark Brest n'en doa ket ereet mat e vag ouzh ar c'hae... aet e oa da ziroudañ e lenn-vor Brest ha degaset e voe dezhañ en-dro gant martoloded a Blougastell. Ur wech all, gwashoc'h, en doa peñseet e vag dre m'en doa staget anezhi re strizh pa oa uhel ar mor : gant an dichal e oa chomet ar vag a-istribilh ouzh ar c'hae ! Neuze, war ali e voereb e tistroas d'an arme hag e Roazhon e timezas gant e wreg, Marie-Thérèse. Daou vugel a savjont e brezhoneg, 25 bloaz bennak a-raok ar skolioù Diwan.

Adalek neuze e kemeras perzh da vat e stourm an Emsav.

Da gentañ e labouras kalz hag e-pad 30 vloaz evit KEAV : kelenner e voe er c'hampoù kentañ e 1946, arc'hantour da c'houde e-pad bloavezhioù. E penn ar c'hamp en em gavas daoust dezhañ e 1973 gant Vefa de Bellaing. Gant ar rummad yaouank c'hwegonteizhat ne voe ket trugarekaet evit e labour pa veze graet goap outañ dre ma oa soudard ha ma oant «a-enep an arme», ha dreist-holl pa voe kinniget dezhañ ganto, un deiz diouzh ar beure, evit farsal evit doare, un arched bihan koad. Gloazet bras e voe gant an darvoud-mañ.

Er bloavezhioù 1962-63 e kengrouas SADED, Strollad An Deskadurezh Eil Derez gant Guy Étienne ha Youenn Olier, un aozadur a rae kentelioù dre lizher war an danveziou a veze kelennet er skolioù eil derez : jedoniezh, fizik ha kimiezh, douaroniezh... Dilezel a raio an arme evit labourat a youl vat leun amzer evit an aozadur-se, war-dro ar sekretouriezh. Diwar e leve bihan a is-ofiser e vevas e diegezh eta e Brec'heg-kozh Plouha, er baourentez evit ar brezhoneg eta. War varc'h-houarn ez ae d'an emvodoù, betek Kastellin a-wechoù !

Neuze e voe skarzhet diouzh SADED a-gevret gant e vignon bras Youenn Olier, a oa chomet kristen eveltañ daoust da vrizhdispac'h 68. Krouet e oa bet ur framm a-us da SADED, ESB (Emsav ar Stad Vrezhon), a oa aet war ar gleizelouriezh, o tilezel ar vroadelouriezh kristen hengounel. Neuze, diwar an darvoud reuzius-se e reas un diwaskadenn c'hrevus a-walc'h a badas ouzhpenn bloaz. Gant ur garavanenn ez eas war an hentoù e bro-C'hall da ziskuizhañ. D'ar mareoù-se eo e reas anaoudegezh gant

KUMUNIEZH AN ARC'H Lanza del Vasto, ur gumuniezh laik hogen diazezet war an talvoudoù kristen hag awenet gant Gandhi.

Distroet e Breizh, e Sant-Dider nepell diouzh Roazhon, ez asantas adkregiñ gant ar stourm o sevel SKOL AN EMSAV e 1969 gant Youenn Olier ha rummad tud yaouank tomm ouzh ar yezh. Bloavezhioù Alan Stivell ha Glenmor e oa. Diwar e atiz e voe labourer hardi war kentelioù ar pevare klas : kentelioù jedoniezh, kentelioù bevoniezh ha kentelioù brezhoneg kevatal d'ar c'hentelioù war ar galleg a oa da neuze er pevare klas. E 1972 avat e rankas dilezel e garg a gadoriad SAE pa 'z eas an tu kreñv gant un tuadur kleizelour – adarre -, hogen ar wech-mañ ne oa ket kleizelour-stadelour hogen kleizelour-poblelour, a-enep da rummad «ar re gozh» a oa kristen-begennelour.

Diouzh un tu all, Youenn Olier ha Paol Kalvez, izili eus EMGLEV AN TIEGEZHIOÙ a-hend-all, goude o eil c'hwitadenn - hini SKOL AN EMSAV - o deus tennet kentel diouzh ar pezh a c'hoarveze, da lavarout eo dispennadur-krenn ar spered kristen en Emsav. Tostaat a rejont ouzh Marsel Blanchard, person Kistinid hag e rojont o zri lusk da gKRISTENION BREIZH, a oa betek neuze ur «glogorenn c'houllo» o vont en-dro e galleg a-hent all. Adalek 1976 ne voe mui komzet galleg en emvodoù. Ar gelaouenn IMBOURC'H, renet ha moulet gant Youenn Olier, goude bezañ bet kelaouenn damgefridiel SAE, a zeuas da vezañ kelaouenn damgefridiel KRISTENION BREIZH. Is-ofiser evel ma oa bet e oa gouest Paol Kalvez da aozañ mat an traoù (e stern mererezh KEAV e oa bet servijustre e skiant prenet daoust d'ar goapaerezhioù) e sammas adarre er gevredigezh-se al labour pleustrekañ, displijusañ, diaesañ : ar sekretouriezh-teñzorierezh. Bep miz ingal etre 1976 ha 1993 e aozas dibennoù-sizhun, devezhioù studi ha pediñ, dreist-holl e presbitalioù Kistinid ha Plouneour-Menez. D'an hañv e rae war-dro "Kamp Kristenion Breizh hag Emglev An Tiegezhioù" e Ti-Parrez Kistinid o vezañ m'en doa dilezet KEAV hag e aergelc'h digristen en doa gloazet kement anezhañ. Bep bloaz ivez ez aoze ur veaj dindan banniel KRISTENION BREIZH : unan da Roma, hag ar re all a bep eil da vro-Gembre, Iwerzhon, Kernev-veur. Bep bloaz en un niverenn arbennik eus IMBOURC'H eo danevellet ar beajoù-se. Ar pal a oa klask sevel un emsav etrekeltiek kristen.

Ne voe ket tizhet ar pal-se hogen darempredoù a zo bet da skouer etre KRISTENION BREIZH ha CYLCH CATHOLIG CYMRU, katoliked kembraegerien, hag etre tud a hiniennoù en Iwerzhon, Kembre, Kernev-veur.

E 1993 e paouezas an emvodoù. Ur gerseadenn e voe adarre hogen bemdez-Doue e kendalc'has Paol Kalvez e-pad tost tregont vloaz da erbediñ evit ar vrezhoneg e brezhoneg gant pedenn bemdeziek ar breviañ gant al levr bet moulet e 1978 gant Job Lec'hvien, «*Pedenn an Iliz*», unanet a spered dre ar bedenn gant izili all KRISTENION BREIZH, strewet dre ar vro.

E keit-se en doa savet Paol Kalvez un ti gant e zaouarn e-unan e kreiz koadeg Pempont ! E soñj a oa sevel un doare kiboutz brezhonek gant un tiegezh all. Ur c'hwitadenn ouzhpenn e voe. E-keit-se ivez, pa oa va c'helenner brezhoneg e lise Sant-Visant Roazhon en doa va aliet da gemer perzh en oferenn vrezhonek a rae war he zro e chapel skolaj Sant-Varzhin. Eñ eo a reizhe hag a skrivereze ar sarmonioù hag a save testenn «*Pedenn ar Bobl*» goude ar Gredo, kement-se bep sizhun e-pad daouzek vloaz da vihanañ.

Aet war e leve a gelenner brezhoneg e kendalc'has e genlabour gant Youenn Olier war-dro ar gelaouenn IMBOURC'H. N'eo ket anavezet evel skrivagner daoust m'en deus skrivet meur a bennad a breder dreist-holl. Troet en deus tammou eus levr a-bouez Dom Gougoud «*Ar C'hristeniezhioù keltiek*» da skouer, pe kelc'hlizher ar Pab Frañsez «*Sklerijenn war ar*

feiz kristen». Dibenn e vuhez a ouestlas, adalek 1993 betek ar poent ma ne c'helle mui gwelout, 25 bloaz eta, da skridaozerezh e brezhoneg liderezh breviañ an Iliz katolik goude Vatikan II, da lavarout eo 6500 pajennad a destennoù tennet eus ar Bibl pe diwar droidigezhioù Marsel Klerg pe diwar e zorn e-unan diwar al latin. Un oberenn veur troet pajenn ha pajenn diwar ar breviañ-skouer e latin ! Un oberenn na zervij tost da zen ebet met a zo ur monumant en hor yezh, marteze a-walc'h maen-bonn diwezhañ da c'hortoz ar Vreizh kristen ha brezhonek a hiraezhe dezhi.

Kalz a draoù all a vefe da zanevelliñ diwar-benn an den-mañ, a zo bet o labourat ken start evit ar yezh hag a ziskouezas, a-hed e vuhez, bezañ kempouez ha start en e soñjoù war un dro, daoust d'ar c'hwitadennoù niverus. Ar re o deus c'hoant gouzout hiroc'h diwar e benn e ranko lenn e levr «*Kambr ar Stered*» bet moulet e 2007 gant Moulladurioù Hor Yezh, leun a furnez hag a ditouroù diwar-benn buhez an Emsav en eil hanterenn an XX^{vet} kantved.

En em gavet eo bremañ dirak an Aotrou Doue, ha gant sant Paol en deus lavaret dezhañ :

*«Stourmet em eus an emgann mat,
echuet em eus va redadenn,
miret em eus ar feiz.
(2 Tim 4, 7)
Doue d'e bardono !*

Tepod Gwilhmod

Sent-paeron ar breuriezhoù

Un arverk eus poblidigezh vrezhon Bro-Naoned

Da gentañ petra eo ar breuriezhoù ? Evit komz eeun e c'heller lavarout ez eo un isrann-parrez, met muioc'h eget-se ez eo, rak war meur a boent e c'heller lavarout edo ar breuriez a-raok ar barrez, peogwir ez eo un evodadur³ eus reizhiad ar c'hlanoù keltiek e-lec'h ma oa brientekaet⁴ al liammoù kerentiezhel, setu perak e oa anvet "breuriez". Pa zeuas ar Vrezhoneg, argaset diouzh o enez gant ar Saksoned, d'en em staliañ en Arvorig, er pempvet hag er c'hwec'hvet kantved ne oa ket, hervez an istorourion, un

³ Evodadur : *émanation*.

⁴ Brientekaet : *privilégié*.

tec'hadeg diouzh Breizh-Veur en dizurzh, hogen kentoc'h un divroadeg urzhiet mat, dindañ renerezh un tiern hag ur beleg pe vanac'h, hag o staliadur en Arvorig en em rae hervez o derez kerentiez etrezo, breudeur, kendirvi, kendirvi-bihan, hag hep mar ebet, o krouiñ kêriadennoù e veze korvoet an douar ganto, en derou da vihanañ, en un doare a-stroll. Anvet e oa "breuriez" ar gumuniezhioù bihan-se hag en em vere o-unan evit o ezhommoù ken speredel ha bedel. Gant pep breuriez e oa ur sant patron, ur chapel, hag en-dro d'ar chapel-se e oa sebeliet re varv ar vreuriez. Mard e chom c'hoazh kement a chapelioù e Breizh, ul lod mat anezho a oa chapelioù-breuriez.

Ar breuriezhoù e Bro-Naoned, emgann Jenglan delanker

Bez' e kaver reizhiad ar "Breuriezhoù" e Bro-Naoned, en holl barrezioù e-lec'h ma voe komzet brezhoneg hag e-lec'h ma kaver anvioù-lec'h brezhonek, met el lec'hioù-se, ne zeue ket ar Vrezhoned eus Breizh-Veur, hogen eus Breizh-Izel evit an darn vrasañ, ha setu perak : War-lerc'h emgann Jenglan (22 Eost 851) e-lec'h ma voe trec'h ar Vrezhoned hag o roue Erispoe war Franked Karl Moal, e voe Feur-Emglev Angers, e miz Gwengolo 851, e-lec'h ma anavezete Karl Moal, roue ar Franked, e oa Erispoe roue Breizh ha Kontelezhioù Roazhon, Naoned ha Retz, evel douaroù Breizh ha na vefe biken ken evit o zabutal.

Brezhonekaat an tiriadoù gounezet

Unan eus disentezioù kentañ Erispoe a voe lakaat dont er c'hontelezhioù nevez-se trevidion vrezhon, seul vui ma rankas un darn eus ar Franked staliet er c'hontelezhioù-se kuitaat ar vro. An drevidion vrezhon-se a zeuas eus meur a lec'h eus Breizh-Izel, hogen ne hañval ket e teuent a unanoù met kentoc'h e oant strollet hervez o parrezioù-orin e Breizh-Izel. Ganto e voe aozet o staliadur e "breuriezhoù", evel ma oa er parrezioù o doa kuitaet, hag hep mar ebet, ar sant gwarezour a voe roet d'o breuriezhoù nevez a voe unan a oa seulabred er barrez o doa kuitaet. Diazezet eo va studiadenn war breuriezhoù parrezioù Gwenvenez-Penfaw, Blaen, Vay, Gourgenew, Derwal, Pierig, Marzheg, Avizeg, Plouzieg, Fegerieg, da lavarout eo Gwalarn Bro-Naoned. Setu ar sent-paeron brezhon-se am eus kavet :

Sant Miliaw : ur sant a gaver e meur a barrez ez eo Sant Milio pe Miliaw, mab Budig, roue Kernev, bet lazhet gant e vreur Rivod. Sant-paeron e vez Miliaw eus ar breuriezhoù Korbalon e Gwenvenez, Lismouzen e Vay, Rozbez e Blaen, hag ouzhpenn e Blaen ez eus ur vreuriezh o tougen e anv er stumm "Millac", ha meur a bezh-douar dre ar barrez a zoug an anv "Millot", "Millaud", "Millat", "Gagnerie⁵ des Milliaux", o lezel da grediñ e voe da gentañ ur vreuriezh vras dindan paeroniezh Sant Miliaw, gant an drevidion gentañ, hag a voe isrannet a c'houdevezh pa zeuas trevidion all. Merkañ a ra

⁵ Gagnerie : gounezvan, ul leur bras pe vrasoc'h ma vez gounezet an douar en-dro d'ur gêriadenn.

paeroniezh Sant Miliaw e tlee an drevidion-se, dont eus Bro-Gernev.

Sant Melar : bez' en doa Miliaw ur mab anvet Melar, a oa yaouank-tre pa voe drouklazhet e dad. Aon en doa Rivod e c'hellfe Melar diarc'hañ un deiz herezh e dad, hag e kasas tud ouzh e gopr evit e lazhañ. Dirak aspedennoù Aorelia, mamm Melar, da chom hep lazhañ he mab, ne voe troc'het dezhañ e zorn dehou hepken, evit na c'hellfe derc'hel ar c'hleze, hag e droad kleiz evit na c'hellfe marc'hegañ. Ober a rejod dezhañ un dorn arc'hant hag un troad arem a aotree dezhañ bevañ tost normal, ar pezh a reas dezhañ bezañ brudet e Kernev. Neuze e goubrenas⁶ Rivod ar C'hont Keryaltan a oa e gward Melar, o prometiñ dezhañ douaroù, hogen gwreg Keryaltan, o klevout avel eus an irienn a gasas Melar da gastell ar C'hont Budig eus Domnonea⁷ e Bro-Dreger hiziv. Daoust da se e voe adkavet Melar ha dre treitouriezh drouklazhet gant Keryaltan hag e vab Sulian. Douaret e voe e Kerfeunteun a voe anvet Lanmeur da c'houde, e 544 e oa. Ken brudet hag e dad Miliaw e voe Melar, ha setu perak e vez o paeroniañ breuriezhoù e Gwenvenez-Penfaw, e hini Kallag, gant ur gêriadenn a zoug e anv : Tremelan, hini Milteg e Blaen, hini Botmelar e Avizeg, hag iliz Fegerieg a zo dindan paeroniezh Sant Mereal a zo un eil stumm eus anv ar sant oc'h eilpenañ ar c'hensonennoù "L" hag "R". Hiziv ar barrez nevez o bodañ Fegerieg, Avizeg ha St Nikolaz-Rödon a zo anvet : "Parrez Mereal-Rihowen". An drevidion o doa dibabet St Melar da sant-paeron a c'helle dont kement eus Kernev ha eus Domnonea, peogwir e oa e vamm Aorelia merc'h ar c'hont Budig eus Domnonea.

Sant Gwengar : Dindan paeroniezh Sant Gwengar eo bet lakaet iliz Pierig hag ez eo patron ur vreuriezh er barrez ; un enezenn war ar stêr Izar e Blaen a zoug e anv : Enez Gwengar. Un trev eus Lezneven (Bro-Leon) e oa Langwengar gwechall, bremañ n'eo nemet ur c'harter eus Lezneven. An drevidion o deus roet anv ar sant-se d'o iliz ne c'hellent nemet dont eus Langwengar. Bremañ ez eo iliz Pierig dindan paeroniezh St Gwenole en abeg d'ur

⁶ Goubrenañ : *soudoyer*.

⁷ Domnonea : *unan eus an teir rouantelezh vihan e derou Breizh Arvorig gant Kernev ha Bro-Warok. Diouzh anv meuriad an Dumnoni, evel Kernev diouzh anv meuriad Kornovi.*

burzud. Da vare drastadurioù an Normaned, menec'h Landevenneg a dec'has kuit trema ar Reter o tougen ganto relegoù St Gwenole. Degouezhet war diriad parrez Pierig, e kreiz an hañv e oa, tomm-tre e oa an amzer, ha tamm dour ebet evit terriñ o sec'hed. En em lakaat a rejont da bediñ St Gwenole, pignat a reas ur manac'h war ur bern reier a oa aze, skeiñ a reas ar roc'h gant e droad ha dour a stinkas diouzh ar roc'h, hag a c'hellas ar venec'h terriñ o sec'hed. E koun ar burzhud-se e voe daskemmet paeroniezh iliz Pierig ha roet da Sant Gwenole. Ouzhpenn-se eo St Gwenole patron breuriezh "Don ar C'hoadoù" e parrez Derwal.

Santez Eodez : ur santez eus Bro-Leon, c'hoar da St Tangi a zo patronez breuriezh "Koadnerion" e Gwenvenez-Penfaw. Ganet eo bet er c'hwervet kantved e kastell Tremazan (rivinet bremañ) e parrez Landunvez. Ne welan ket tud all estreget ar re eus an tolead-se, evit reiñ santez Eodez da batronez d'o breuriezh nevez e Gwenvenez-Penfao.

Sant Efflamm : ar sant-se, eus Bro-Dreger, a zo patron Breuriezh Beix e Gwenvenez, ur gêriadenn a zoug e anv distummet : Boudaffay. Nemet tud o tont eus Bro-Dreger a c'helle envel Sant Efflamm d'o breuriezh nevez. E Blaen ez eus div vreuriezh kichen-ha-kichen, unan anvet "Eff" hag an eil "Flan". N'em eus prouenn ebet, met, o lakaat an daou anv a-gevret hon eus "Efflan". Da gentañ e c'hell bezañ bet ur vreuriezh vras dindan paeroniezh sant Efflamm, ha war-lerc'h, gant ar boblañs o kreskiñ eo bet rannet e daou.

Sant Gourlae : anvet eo kastell Blaen "*La Groulaie*", anv a zo da dostaat ouzh "*Langrolay-war-ar-Ranz*" ma vez ar gerdarzh *Lan* + *Gourlae*, anv ur sant brezhon eus Domnonea. Gwelout ivez *Langourlay-St Donan* (22800) ha *Langourla* (22330). Gant *La Groulaie* Blaen, ar ger "*Lan*" a vije bet berraet da "*La*" ha kemeret evit ar ger-mell gallek "*la*". Anv sant Gourlae a vez ivez gant anv ur gêriadenn er barrez : "*Le Crolay*" a zo evit "*Lez Grolay*" (Lez Gourlae). Anv ar vreuriezh a zo "Breuriezh ar C'hastell" ha Sant Rok patron ar vreuriezh hiziv gant e chapel dalc'het e ratre vat, met Sant Rok a zo ur sant eus ar pemzekvet kantvet, neuze e oa ur sant all a-raok, hag hep re a var e tlee bezañ sant Gourlae.

Sant Judog : breur Judikael, roue Domnonea, eo Sant Judog. Oc'h emdreiñ e tlefe bezañ hiziv "**Juzeg**" hag e Gwenvenez-Penfaw ez eus ur gêriadenn a zoug e anv, da lavarout eo "**Juzet**", distaget "Juzett" e galleg ar c'hornad, met "Juzè" distaget er mitaweg, ar pezh a c'houlenn "Juzeg" keñveriet gant "Dreneuc" e Fegerieg, e Avizeg hag e Hierig, distaget "Dërneu" e mitaweg. Adsavet brav eo bet chapel ar vreuriezh gant an tiegezh du Halgouet ha bremañ emañ dindan paeroniezh sant Mark, met en derou e tlee bezañ dindan hini sant Judog.

Sant Ruellin : pe *Riwelen*, diskibl sant Tudwal hag e warlerc'hiad en eskobiezh Landreger a zo patron Breuriezh "Botrule" en Avizeg hag hini "Liscoet" e parrez Gourgenew.

Sant Samzun : unan eus ar seizh sant o deus krouet eskobiezhoù Breizh eo Sant Samzun, evitañ hini Dol-Breizh. Patron eo eus Breuriezh "Henlez" (Henleix) e Blaen.

Sant Meven : niz St Samzun e oa. Krouiñ a reas abati Gaël (Gwazel) e lec'h e voe manac'h Judikael, roue Domnonea. Ken brudet e voe ma 'z eus ilizoù ha chapelioù dre Breizh a-bezh ha kêriadenn ha kêrioù o tougen e anv evel St Meven ar Braz e kichen Gaël ha daou Tremeven (unan e Kernev e-kichen Kemperle, hag unan er Gouelou), ma'z eo diaes lavarout eus pelec'h e teue an drevidion-se o deus kemeret St Meven evit o fatron breuriezh, evel hini "Bodebril" e Blaen hag hini "Essarts" e Derwal.

Sant Brieg : emañ anvet "Sant Briec" ur gêriadenn eus parrez Plouzieg (Plessé) er vreuriezh *Lavrac* a zo, marteze, da adlakaat en e stumm-orin : *Lanvrac* > *Lanvriac*, ma vez gwelet ennañ *Briac*, un eil stumm eus *Brieg*, daoust ma 'z eus ur St Briac, a orin iwerzhonat, krouer ur manati e Boulvriag a zoug e anv. St Brieg a zle bezañ bet patron breuriezh *Lanvriac*.

Sant Sieg : Plouzieg o vezañ skrivet *Plebs Sei* e kartular Rödon e c'hell sant Sieg bezañ e ziazezer, seul vui ma 'z eo un diskibl eus sant Brieg, ha sant Brieg bezant e Plouzieg en anv ur gêriadenn, ha patron ur vreuriezh. Patron eo ivez eus breuriezh "Sarran" e Gwenvenez-Penfaw dindan an anv sant Siou⁸, un eil stumm eus Sieg, bet gwall komprenet hag amsavet gant Sant

⁸ Sant Siou : ganet on bet er vreuriezh Sarran ha patron ar vreuriezh a oa sant Siou ; ti-feurm va zud a oa anvet sant Siou ivez

Cloud, ur Frank a gaver e anv gant *Saint Cloud* e-kichen Paris. E Blaen ez eus ur gêriadenn anvet St Cloud ivez a c'hellfe bezañ bet Sant Siou gwechall gozh.

Santez Uriell : unan eus ar pemp merc'h eus Judhael roue Domnonea, ha neuze c'hoar da St Judikael ha St Judog ez eo Santez Uriell, ha patronez Breuriezh Sutz-Gawmaen en Avizeg. Ar nav sant-se : *Efflamm, Gourlae, Judog, Ruellin, Samzun, Meven, Brieg, Sieg, Uriell*, holl eus Domnonea a c'hell bezañ bet degaset, evit lod anezho, gant tud o tec'hout diouzh drastadurioù an Normaned, evel menec'h Landevenneg o tegas St Gwennole e Pierig.

Sant Bili : eskob Gwened e voe St Bili (892-943) ha patron eo eus breuriezh Carheil e Gourgenew, hini Lezin en Avizeg hag hini Rohel e Derwal.

Sant Kast : a orin eus Iwerzhon e voe diskibl sant Jagu, breur Sant Gwenole ha sant Gwezheneg. Pa voe marv sant Jagu ez eas da Roma e-lec'h e voe merzheriet. Kumun Kast e Kernev a zoug e anv ha Sant Kast ar Gwildou en Aodoù an Arvor. Kêriadennoù anvet *Langast* ez eus e Plesala ha Merleeg (22) hag e parrez Vay (44) e breuriezh *Botruen* e vez sant Kast patron, hag ez eus ivez ur gêriadenn anvet *Langast*. E parrez Avizeg, ez eo sant Kast patron breuriezh Roslan, hag ez eus marteze e anv er gêriadenn anvet *Kastonneg*.

Sant Ballae : pe *Wallae* (a hañval bezañ eil rann anv St Gwenole a oa *WinWaloe* e brezhoneg kozh) diskibl eus Sant Gwenole, e voe manac'h e Landevenneg er VIvet kantved, ha war-lerc'h penetiour e Ploermellac e-kichen ar Faou. E anv a gaver e *Lanvallae* ha *Plouballae* o daou en Aodoù an Arvor. En Avizeg ez eo patron breuriezh *Penhoet* hag ur gêriadenn anvet *Ramballay* (rann + Ballae) a zoug e anv. O tont eus Kernev e tle dont an drevidion o deus kemeret e anv da batron o breuriezh.

Sant Marzhin : mignon sant Ballae/Wallae e oa, bet penetiour gantañ, a zo patron breuriezh Gavressac en Avizeg. An drevidion o kemer anezhañ evit patron o breuriezh a zlee dont eus an hevelep tolead ha re breuriezh Penhoet.

Sant Rihowen : diskibl eus sant Konwoïon ha manac'h en abati Rödon ez eo patron breuriezh Rosrion e Avizeg hag hini Trelan e Blaen. Nester Avizeg ha Blaen ouzh Rödon ne ro ket titouroù eus pelec'h e teue ar re o deus dibabet

Rihowen evel patron o breuriezh, e vrud a oa trawalc'h moarvat. E anv bihanaet e "Rihen" pe "Rien/Rion" e vefe anver prarrez Plurien (22240).

Sant Dewi : Istor sant Dewi n'eo ket unan boutin. E vamm santez Nonn, merc'h ar c'hont Brec'han eus Kembre, a voe leanez ez yaouank ; e-kerzh ur veaj e kejas gant Xantus, roue Keretik (Cardiganshire) ; lorbet e voe gant he c'hened bras, met disteurel a reas-hi e ginnigoù peogwir e oa leanez. Neuze e voe gwallet gant Xantus hag en em gavas dougerez. Tec'hout a reas war-zu Breizh-Arvor gant ur stollad Brezhoned a zivroe da Arvor. En em repuas en ur c'hoad e-kichen Dirinon e-lec'h e c'hanas he mab a voe badezet Dewi. Manac'h e teuas da vezañ yaouank-tre hag e levezonas kalz ar vanac'helezh en Arvor. Mont a reas da Gembre e-lec'h e voe eskob, krouiñ a reas meur a vanati, ma voe Glastonbury an hini brudetañ, dont a reas da vezañ arc'heskob Kembre hag hiziv ez eo sant patron Kembre. Deuet eo e anv Dewi da vezañ dreist-holl "*Divi*" e brezhoneg evel e *St Divy* (29), *Brandivy* (56), *Landivy* war harzoù Breizh gant ar Mayenn. Troidigezh e anv e latin, *Davidagus*, en deus devoudet ar stumm skrivet *David, Davy*, e Breizh-Uhel ; evel-se, ez eo sant Davy patron breuriezh ar Poulldu en Avizeg ha breuriezh Blouzag e parrez Gourkenew. Krouidigezh breuriezh ar Poulldu gant sant Davy patron a hañval bezañ devoudet daskemmadur anv parrez Auessac e kartular Rödon, meneget un daouzek gwech bennak, *Avizac, Aveziaco, Avizaica, Avezac*, hag er F^o 120rv, er bloaz 869, ez eo skrivet *Daviciaca* ha *Davizac* (ar stumm *Clavizac* notet gant Bernard Tanguy e levr II ar c'hartular, p. 65, evit *Davizac*, a zo faos, n'eo nemet an "d" nann serret awalc'h ha lennet "cl"). Diskouez a ra marteze ar stummoù-se, *Daviciaca* ha *Davizac*, mennentez an drevidion nevez da lakaat donoc'h merk sant Dewi/Davy war anv ar barrez ; ar bloaz 869 a glotfe gant donedigezh an drevidion nevez.

Sant Glenn : diskibl eus sant Koulm e oa, a orin iwerzhonat. Patron breuriezh *Bran* e Derwal eo. Ur barrez eus ar Menez, e pastell-vro St Briec a zoug e anv : *Sant Glenn* hag unan all, *Chapel Glenn*, e pastell-vro Kastellbrient e Bro-Naoned. Ul liamm a c'hell bezañ etre an tri.

Sant Rieul : diskibl sant Gwenole eo, met *Rieul* n'eo nemet ur stumm eus anv *sant Riog, Rieg*,

Riou, Rieu, Rieul. Manac'h e voe e Landevenneg hag e dibenn e vuhez penetiour en ur mougev e kichen Kamared. Patron eo eus breuriezh *Haut-Pelliais* e parrez Vay.

Sant Riwal : breur santez *Riwanon* hag eontr sant *Herve* e voe sant *Riwal*. Patron eo eus breuriezh ar *Moulin-Rivaud* e parrez Gourgenew, hag e anv en em gav e anv ar vreuriezh dindan ar stumm *Rivaud*, distaget *Rivaw* e mitaweg. Ur barrez eus ar Menezioù Arrez a zoug e anv : sant *Riwal*.

Sant Teliaw : *Telo, Telio, Teliac*, hervez al lies skrivadurioù, a voe ganet e Kembre. A c'hanedigezh uhel e oa peogwir unan eus e c'hoar a zimezas gant Budig II roue Kernev Arvorig. Bez' e voe diskibl eus sant *Dubrig* arc'heskob Landaf. En abeg d'un darreuziad bosenn velen e Kembre e kuitaas e vro gant un toullad eus e genvroiz evit en em repuiñ en Arvorig e-lec'h e voe degemeret gant sant Samzun, eskob Dol a viras anezhañ evit ober war-dro e eskobiezh, e-pad ma oa eñv, Samzun, oc'h ober war-dro aferioù Judwal, hêr reizhwiriek rouantelezh Domnonea, ac'hubet gant an alouber Konomor. Chom a reas seizh vloaz e Breizh, hag o vezañ ma ne oa mui a vosenn velen e Kembre, e tistroas d'e vro hag e voe anvet eskob Menevia. Meur a barrez a zoug e anv : *Landelo* (29), *Sant Telo, Pledeliac* (22). Patron breuriezh *Eff* e Blaen eo, hag e anv en em gav en ul lec'h anvet *Pradeier Brodelio*, hag er gêriadenn *Bredeloup* (bre + Telo) a zo bremañ e parrez Lokmaria-al-Lanneier, bet distaget diouzh Blaen evit krouiñ ar Barrez nevez-se, tro-dro da 1850.

Sant Maeldan : anvet eo *Maldan* ur c'harter eus beuriezh ar Flan e Blaen. Ne oa nemet un ti, met brudet e oa dre ma oa ur vengleuz e-lec'h ma veze tennet mein evit sevel an tiez. *Maldan* a zle bezañ evit *Maeldan*, sant anver parrez *Plumaudan* (22250) hag ur gêriadenn anvet *Locmeldan* e parrez Sant Berteleme e kichen Baod. Joseph Loth en e studiadenn eus Sent Breizh, embannet er *Revue Celtique* e 1909 a notenn ar stumm ar muiañ azonus a vefe "*Plomaldan*" en anv "*Judicael de Plomaldan*" e-barzh un diell eus 1130 e Kartular Sant Melen. Setu ur brouenn e vefe *Maldan* ur stumm eus *Maeldan* e Breizh-Uhel. N'em eus prouenn ebet evit *Maeldan* e Blaen, met *sant Maeldan* a c'hell bezañ bet patron kentañ ar vreuriezh en navet kantved, ha kemmet war-lerc'h, rak ez eo

bremañ Sant Beneat Mazereg patron ar vreuriezh.

Sant Arzhmael : pe *Arzhel* hag *Armel, Ermel*, evit e stummoù berraet, a zo patron breuriezh Sant *Armel* e Fegerieg. Ganet e voe e Kembre e Penn-Oc'hen er Glamorgan en ur familh nobl, a reas dezhañ bezañ savet ha kelennet en ur skol manac'hel. Diwezhatoc'h e voe beleget, hag evit leuniañ e c'hoant da avielañ e treuzas Mor Breizh evit mont da Arvorig gant un nebeut keneiled, hag e tilestras e 518 en un aber a zo hiziv *Aber-Ildud*. Ar venec'h en em stalias ul lev diouzh an aber en ul lec'h anvet hiziv *Plouarzhel*. O brud a zedennas buan diskibled, neuze e fizias Arzhmael renerezh ar manati da unan eus e venec'h hag e adlestras o ledañ an aod etrezek ar c'hreisteiz. Un ehan a reas e kichen Kemper en ul lec'h anvet hiziv *Erge-Armel*. Un ehan nevez e derou gourenez Kiberen, en ul lec'h anvet hiziv *Plouarnel* hag unan all hiroc'h e reter Pleg-Mor ar Morbihan en ul lec'h anvet hiziv *Sant Armel*. Kontelezh Gwened o vezañ dindan levezon ar Franked er 6vet kantved, brud santelezh *Armel* a zeuas betek Childebert o roue, ha pedet e voe da vont en e lez. Mont a reas gant c'hwec'h kompagnun. A-benn un nebeut mizioù e lezas Childebert ar c'hwec'h manac'h da zistreiñ da Vreizh, hogen mirout a reas *Armel* ouzh e gichen e-pad seizh vloaz. Distroet e Breizh e stalias ur c'hentañ manati 13 km diouzh Roazhon, hiziv Sant *Armel*, evel gourc'hemennet gant Childebert. Diwezhatoc'h e krouas ur manati all nepell diouzh Koadeg Brekilien hag en em ziorras awalc'h evit dont da vezañ *Ploermael* (Ploe-Armel). Mervel a reas d'ar 15 a viz Eost en e vanati St *Armel*.

Sant Maeleg : bet ganet e Kembre, diskibl sant *Kadeg* ha sant *Kebi*, ne zeuas ket en Arvorig, neuze, parrezioù *Pleumeleuc* (35137) ha *Plumelec* (56420) a zoug e anv, a zle bezañ bet savet gant Brezhoned o tont eus Kembre, o tivroañ da Arvorig, hag o doa kuitaet un tolead e-lec'h ma oa enoret Sant Maeleg. Daoust hag ez eo an hevelep Brezhoned kembreat o deus krouet breuriezh *Treveleuc* e parrez Marzheg ma 'z eo sant Maeleg ar sant-patron ? A c'hell bezañ ! Menegomp ivez *Treveleg* ha *Tremelu* e parrez Sant Lifarzh e gourenez Gwenrann, *Melo* (evit Maelog) e Sant Yoakim ha *Meluc* e parrez Hierig.

Testeni al lec'hanvadurezh vrezhonek : da notañ ez eo bet roet un anv brezhonek, distummet a-wechoù, da veur a vreuriezh, da skouer : *Koadnerion, Boudaffay*⁹, *Juzeg, Penfaw* ha *Tremelan* e Gwenvenez-Penfaw ; *Poulldu, Rosrion, Botmellar, Botrule, Penhouet* en Avizeg ; *Trelan, Henleix, Millac, Bodebril, Boucahan, Bouguyoù, Magoer* e Blaen ; *Lismouzen,*

⁹ *Bod* a zeu da vezañ *boud* a wechoù, hag an “*d/t*” a gouezh peurvuiañ pa vez ur gensonenn o kregin ar ger da heul, da skouer : *Boucahan, Bouguyou...*

Liscouet, Botruen, Carheil, e Vay-Gourgenew ; *Koadmur, Bran, Rohel* e Derwal ; *Henrieug* ha *Trouhel* e Fegeriec ; *Treveleuc* e Marzheg ; *Trelan, Tregouet, Lansieg* e Plouzieg. Se zo evel-just hep kontañ al lec'hanvioù brezhonek all a gaver niverus a gaver niverus er parrezioù-se, ha n'int ket sez breuriezhoù.

Yann MIKAEL

Istor Breizh - Levrenn 4 - Barthélémy Pocquet - p. 70 da 73

REN YANN IV

TREDE LODENN.

ARVELL YANN IV GANT

KONESTABL KLISON.

(1984-1395).

Ar c'hwec'h bloavezh a heulias eil feur-emglev Gwenrann – 1381 da 1387 – a c'haller sellout outo evel re wellañ ren Yann IV, ar re beoc'husañ, ar re spletusañ evit Breizh, ar re enorusañ evit he dug e-doug ar prantad hir-mañ o vont eus 1364 da 1399. O lezel a-gostez e saozkarantez, e tostaas Yann IV ouzh Bro-C'hall e-pad ar bloavezhioù-se, a voe rentet servijoù bras dezhi gantañ hag e Vrezhoned, a-enep Bro-Saoz zoken, e-barzh brezelioù Flandrez 1382 ha 1383, oc'h aozañ un emglev etre an div gurunenn.

O tennañ spletoù ampart diouzh ar bras ha nerzhus a santad broadel en doa e adsavet war an tron, e c'hellas an dug en em glevout gant hogozik holl pennoù ar vrientinelezh vrezhon, an holl varoned o doa stourmet ken taer ha ken pellamzer a-enep dezhañ hag a-enep e gaoz e-kerzh brezel Bleaz ha Moñforzh. Ober a reas e doare da lakaat da zisoñjal ar santimantoù kozh-hont ; kreñvaat a reas beli an dug hag ober a reas ganti – pe klask a reas ober ganti – evit diogelaat d'e bobl madelezh ur renerezh reizh, difenner gwirioù ha gounidoù pep hini. Komz a raimp diwezhatoc'h gant muioc'h a vunudoù diwar-benn gouarnerezh ha melestradurezh Yann IV, tu gwellañ e ren.

Bremañ e rankomp kenderc'hel da zibuniñ heuliadenn darvoudoù politikel e ren, hag urzh an amzerioù a c'halv dirazomp unan eus kurioù

tristañ Yann IV : e arvell a-enep ar c'honestabl Olier Klison.

§ 1^{añ}. – *Orinoù an arvell (1384-1387).*

Janed Pentevr, intañvez Charlez Bleaz, a varvas e Gwengamp, d'an 10 Gwengolo 1384, hep bezañ adwelet he daou nevez ganet, Yann ha Gwion Bleaz pe eus Breizh-Pentevr, kondaonet abaoe 1356 da chom en toull-bac'h e Bro-Saoz betek paeamant klok pikol daspren o zad, a chome c'hoazh un darn vras anezhañ da vezañ sevenet, hag a oa o mamm hervez doare divarrek da c'hourfennañ.

Ur mellad eus kentañ feur-emglev Gwenrann (hini 1365) en doa diferet penaos Janed Breizh-Moñforzh, c'hoar an dug Yann IV, a zimezfe gant Yann Breizh-Pentevr, an henañ eus mibien Charlez Bleaz ; penaos e pourvezfe Yann IV d'an degouezh-se 100,000 lur evit daspren ar prizoniad-se hag e rafe gant gred evit kaout dieubidigezh klok an daou briñs Pentevr. Ar mellad-se a oa chomet diefed, rak ne oa ket c'hoarvezet an dimeziñ, ha Yann IV n'en doa graet netra evit kaout dieubidigezh mibien Charlez Bleaz. Gwion ar yaouañ a oa marvet e Bro-Saoz nebeut amzer war-lerc'h e vamm ; Yann an henañ, dilezet gant pep hini, en doa nebeut tre a chañs da adwelout e vammvro ha da adkavout e frankiz, ha gouzañvet en doa forzhik n'eus ket pell.

Ar Saozon a zalc'he droug ouzh Yann IV abalamour d'ar pezh en doa graet dezho, en desped dezhañ koulskoude, p'en doa galvet anezho e Breizh e 1380 evit o lakaat da gas o brezeliadenn dristañ kent o c'has en-dro d'o bro, mezhus, ar bloaz war-lerc'h. Evit en em veñjiñ ez empennjont teurel etre e zivhar Yann pentevr,

a c'hallje aes bezañ trec'h war Moñforzh kollet gantañ harperezh Bro-Saoz, pe zoken stourmet gant ar Saozon.

Neuze, eme Froissart, « Yann Breizh a voe degaset dirak roue Bro-Saoz hag an aotrouien. Ha lavaret e voe outañ e vije anvet dug Breizh, hag en dije da wreg an itron Fulup, merc'h dug Lancaster, met dugelezh Breizh – gant ma asantje he mirout – a rankje derc'hel e feiz hag e gwazoniezh ouzh roue Bro-Saoz... An itron merc'h an dug (a ouzhpenn Froissart), en dije asantet da zimeziñ ; hogen touiñ a-enep kurunenn Bro-C'hall, biskoazh n'en dije graet kement all, gwelloc'h e oa gantañ chom en toull-bac'h e-lec'h ma oa bet e vuhez-pad. » An nac'hadenn galonek hag hael-hont « a yenaas ar Saozon da reiñ gras dezhañ : » adtaolet e voe d'an toull-bac'h ha ne voe ket kuzhet dezhañ penaos, dre ma ne vije morse paet e zaspren, e tleje breinañ ha mervel eno.

Goude marvidigezh e vamm, Yann Pentevr, ha ne c'halle ket merañ e bennaj nag e veskontelezh e Limojez nag e zouarou all e Bro-C'hall, pa oa en toull-bac'h, a voe rediet da gavout un *alter ego*, un dileuriad, anvet letanant-jeneral. Ret e oa dezhañ ur gwaz sur, galloudek, gouest da ouarnañ ha difenn an hêrezh vras-se, hag a vefe troet mat ouzh ti Pentevr hep arvar ebet. Gant Olier Klison e kavas kement-se ; evel-se e fizias ennañ ar renerezh veur-se, da lavarout eo gouarnerezh e holl vadoù, dre akta ar 6 Genver 1385. Un dlead eus ar garg-se e oa degas da soñj d'an dug Yann IV ar redi gourlakaet warnañ, dre feur-emglev Gwenrann, da labourat e-sell da zieubidigezh Yann Pentevr, ha da reiñ da vihanañ 100,000 lur. Klison en greas, hep ober berzh avat. Yann IV a chomas yen a-zivout ar mellad-hont ha goude-se e krogas da gaout disfiz ouzh ar c'honestabl.

Hennezh avat a gendalc'has da oberiañ evit klask reiñ e zieubidigezh da vab Charlez Bleaz. E-pad mizioù kentañ 1386, e ouezas penaos roue Bro-Saoz, a venne harpañ Roperz de Vere kont Oxford hag e skoazell da c'houzañv kargoù gouarnerezh Iwerzhon a oa bet fiziet ennañ, a oa o paouez reiñ dezhañ kont Pentevr (23 Meurzh 1386), ouzh e aotren da lakaat an daspren a venne evitañ. Klison a gasas kerkent un den a fiziañs da zug Iwerzhon (da lavarout eo Roperz de Vere) evit gouzout e vennadoù ; an dug a lakaas daspren kont Pentevr da 120,000 lur ; dileuriad Klison neuze az eas da gavout an tiern-

se hag, a-berzh ar c'honestabl, e kinnigas dezhañ paeamant an daspren ha dorn eil merc'h Klison anvet Marc'harid : kinnig doubl a voe asantet gant an tiern hep termal.

Brud an difraeou-se, daoust ma ne oant ket foran, a zegouezhas hepdale d'an dug Yann IV ouzh e lakaat fromet bras. Etre Klison hag eñ en doa graet e saozkarantez ur c'hourzhenebadur a oa bet lakaet anat e meur a geñver, betek 1380. Goude eil feur-emglev Gwenrann, e oa Yann IV tostaet ouzh Bro-C'hall ha tostaet ivez ouzh ar c'honestabl ; skoulmet en doa gantañ zoken ur feur-emglev espar hon eus meneget uheloc'h, skrivet en ur stil, a c'halled krediñ, a ziskoueze santimantoù a vignoniezh vat. Hogen, holl diskredoù, holl gasonioù Yann IV, bev c'hoazh, a voe enaouet en-dro a-daol-trumm. O welout an eured raktreset gant ar c'honestabl e kredas en un irienn war berr dermen a-enep an tron, – ne hunvreas ken nemet en doare da ziarbenn anezhi.

Abegoù en doa c'hoazh da gaout droug ouzh Klison.

Ar roue gall Charlez VI, daoust ma n'en doa ket evezh hag ampartiz politikel e dad Charlez V ar Fur, en doa da vihanañ an hevelep kasoni a-enep an estren alouber e rouantelezh, an hevelep karantez ouzh dizalc'hiezh ha kevanded, anterinded, Bro-C'hall. E ijin hag e yaouankiz a lakae anezhañ da gaout dezoioù meurdezus, her pe heroc'h. Evit dieubiñ Gwienna ha proviñsoù ar C'hreisteiz krommet c'hoazh dindan ar yev saoz, e hañvale dezhañ bezañ un aloubadenn c'halloudek e Bro-Saoz an doare gwellañ, a rofe tu da flastrañ ar Saozon en e vro war un dro.

E 1386, ur strollad-listri meur a voe akipet ha tolpet e-barzh porzh ar Skluz, e Flandrez. Pennoù vrasañ ha gredusañ ar vrezeliadenn-se a oa dug Bourgogn, eontr ar roue, ha konestabl Klison. Hennezh az eas d'ar Skluz gant ul lestraz 72 gouel bodet e porzhioù Pentevr, hag ouzhpenn, ur gêr goad 3000 kammed treuzkiz, savet e bro Dreger, a c'halle bezañ savet e nebeut amzer, gwintet, kaset war an douar saoz e-lec'h an dilestradeg, o stummañ evel-se evit an arme c'hall un diazez oberiata ha, ma oa ezhomm, ul lec'h repu kalet tre.

Hogen embregadennoù un eontr all d'ar roue gall, dug Berri, enebet tre ouzh ar vrezeliadenn, gounezet d'ar Saozon marteze, e itrikoù hag e zaleoù raksoñjet a reas d'an armadur-se bezañ

didalvez. Ne felle ket d'ar roue loc'hañ hep an eontr-se, ha pa erruas hennezh gant dale bras er Skluz gant e strolladoù, e oad e miz Kerzu ha re fall e oa an amzer evit kemer ar riskl da vont war vor dre aon da zistrujañ al lestraz er gorventenn. Ret e voe gortoz ar bloaz war-lerc'h eta, 1387.

Gwir eo, bloaz war-lerc'h, adal an nevezamzer, e labourad start da vodañ ul lestraz adarre, un arme, hag an hini gredusañ d'an trevell a oa Klison, a tutae tud en arm war aodoù Treger, a frede listri, a ratree e gêr goad a oa bet gwallgaset gant ar gorventenn.

O krenañ e oa Bro-Saoz dirak ar brientidigezh-se ; efreizhet e oa dug Breizh gant ar veli meurbet, ar galloud dispar a zeufe da Glison ma rafe berzh e embregadenn. Ha peogwir e oa chomet tomm ouzh ar Saozon e don ennañ, e oa chalet, enkrezet evit e vignoned tra-mor. Klask a rae un doare bennak da ziduañ diouto ar pirilh-se.

Gouzout a rae ar c'haz o doa outañ abalamour da vrezeliadenn vantrus arme Buckingham (e 1381), ken gwazh m'o doa klasket broudañ Yann Pentevr a-enep dezhañ da ober anezhañ dug Breizh en e lec'h. Yann IV a venne groñs habaskaat an droukrañs-se hag adkavout grasoù mat ar Saozon. Dre forzh soñjal e-se, e kredas bezañ kavet an tu. Lezomp Froissart da gomz avat, a-benn na vezañ tamallet da lavarout an traoù evel a blijfe deomp e vefent. Froissart a roio deomp, gant e feiz vat divrall hag e fealded

ordinal, meno boutin, glan, e gantved diwar-benn an darvoud.

« Dug Breizh a reas e veno, hag ijinañ a reas ar pezh a c'hellfe ober mar plijfe gant ar Saozon. Peogwir e ouie mat e oa an aotrou Olier Klison, konestabl Bro-C'hall, an den doujet ha kasaet ar muiañ gant ar Saozon. Rak, da lavarout gwir, Klison ne rae noz ha deiz nemet empenniñ doareoù da wallgas ar Saozon, hag arme ar Skluz (e 1386) en doa taolet en aner, hag ouzhpenn e oa rener (e 1387) an hini a oa o sevel e Harfleur ha gant Lantriger. Lavarout a reas an dug Yann IV outañ e-unan penaos, evit plijout d'ar Saozon ha distreiñ en o grasoù mat ha diskouez ne rae ket gwall van ouzh karantez ha grasoù ar C'hallaoued, e torrfe ar veaj (brezeliadenn 1387), hep gallout difenn ouzh an dud-se da vont da Vro-Saoz. Nac'hen, mennout a rae oberiañ muioc'h dre guzh... Kemer a rafe konestabl Bro-C'hall ha migañ anezhañ hag ober dezhañ beuziñ. Ha plijet e vefe ar Saozon, rak kasaat kreñv a raent anezhañ. »

Evel-se, evit skeiñ war Klison, en doa Yann IV daou abeg : en un tu, ar c'hoant da servijout kreñv ar Saozon ha bezañ deuet-mat ganto a-nevez ; en tu all, e aon dirak raktresoù emglev ar c'honestabl gant ar re Bentevr. Diwar an div vammenn-se e strinke takenn ha takenn e-barzh kalon Yann IV ur vuanegzh, o sevel ennañ tamm ha tamm, o virviñ, a oa o vont da ober strakal un darzhadenn reuzeudik.

En niverenn gentañ : § 2. – *Fetepañs Yann IV a-enep Klison (26 Mezheven 1387).*

Notennoù diwar an darvoudoù gant Yann Menezgwenn

D'ar Sadorn 24 a viz Gouhere ez eus diskeladegoù bras e meur a gêr vreizhat. Kontet ez eus bet miliadoù a dud e Kemper, e Brest, e Sant-Brieg, e Naoned, en Oriant, e Montroulez. E Gwened e oa bet aozet an darvoud gant Bertrand Deléon, ur Breton anavezet-mat er gêrhont, emsaver ha brezhoneger anezhañ, ha tolpet ez eus bet war-dro 10,000 den a-drugarez dezhañ. Un taol-kaer eo pa ouzer brud ar gêr wenetat kozh, brudet evel bourc'hiz hag a-du gant Pariz peurliesañ. An holl diskeladegoù-se, rouez-kenañ e kreiz an hañv, a ziskouez mat pegen enebet eo ar Vretoned ouzh an tremen-yec'hedel rediet gant ar prezidant gall

Emmanuel Macron war hor pobl. Gant ma pado an enebiezh-se ! Ret eo resisaat e oa c'hoarvezet an diskeladeg kentañ a-enep d'an tremen-yec'hedel d'ar Sadorn 17 a viz Gouhere, ha pep Sadorn abaoe ez eus bet hevelep diskeladegoù e Breizh a-bezh.

Roma, Italia. Ha pa c'hoarvez muioc'h-mui a ziskeladegoù a-enep an tremen-yec'hedel, anvet tremen-glas eno (*green-pass*), e oa troet da c'hwerv ar soubenn diriaou 29 Gouhere, e-kreiz ar parlamant broadel italian. Ur gannadeg he deus tarzhet e-pad un abadenn parlamantel, etre kannaded a-du ha kannaded a-enep an tremen-yec'hedel. Izili ar strollad Breudeur Italia dreist-

holl a zo enebet outañ. Ret e voe da brezidant ar gambr lakaat paouez d'an abadenn. D'ar 6 Eost e oa deuet an tremen-glas italian da vezañ ret er vro a-bezh, a-benn gallout mont e-barzh ar pretioù, tavarnioù, sinemaioù, poullou-neuial, mirdioù, c'hoarivaou ha salioù-sport ha c'hoari. Dres evel e Breizh.

Ar c'hamp hañv marc'h-houarn a zo c'hoarvezet etre ar 7 hag an 21 Gouhere tremenet. Ur c'hamp vakañsiñ Sant Visan Ferrer e oa, aozet gant asant eskopti Gwened, ha lusket gant an danvez-beleg yaouank Mazhev Vannier eus Pontivi. Berzh en deus graet ar c'hamp, gant trizek krennard etre 9 ha 14 bloaz. Bemdez e oa un tennad-hent d'ober war marc'h-houarn, a-dreuz bro Wened, ha bemnoz e veze savet an teltennoù evit debriñ ha kousket war un dachenn brivez – prestet a galon vat gant brezhonegerien, peadra da lakaat ar re yaouank da gendivizout gant tud eus ar vro. Pemp ambrouger a oa oc'h heñchañ ar c'hamp, en o zouez Tepod Mab Kerlevenez eus Ar Gouloù Gwenn, met ivez Erle Gwilhmod mab Tepod Gwilhmod. Ar grennarded, danvez-brezhonegerien anezho p'emaint skoliataet en hentadoù divyezhek, o deus graet araokadennoù bras war ar yezh dre gomz, ha kement-se en ur aergelc'h breizhek ha katolik. Plijadur zo bet !

E Bro-C'hall, e kêr Saint-Laurent-sur-Sèvre (Vendée), ez eus bet drouklazhet ur beleg en e iliz. Hervez ar gelaouenn *Valeurs Actuelles* e vefe ar muntret ur repuad rwandat erruet eno e 2012 hag a oa bet degemeret ha kemeret e-karg e-touez kumuniezh katolik ar barrez. Pebezh doare d'he zrugarekaat ! Anavezet e oa an drougoberour gant ar polis pa vije-eñ an hini kiriek eus tangwall iliz-veur Naoned e Gouhere 2020. Sañset e oa da vezañ skarzhet diouzh Bro-C'hall e 2019 seulabred, met peogwir en doa taget hon iliz-veur ur bloaz goude, e felle d'ar justis gall derc'hel anezhañ evit ma vefe barnet en he bro. Ha setu anezhañ o lazhañ ur beleg. Gourc'hemennnoù bras da ouarnerezh dispar Bro-C'hall. Ra dalvezo deomp da c'hourzhskouer evit ar Vreizh dizalc'h a savimp en dazont.

Trugarez vras a fell deomp lavarout d'ar gevredigezh vrezhon *Adaoz*¹⁰, eus Malañseg, evit ar sikour he deus gallet kas deomp er miz-

¹⁰ Gwelout niv. 14 A.G.G. diwar-benn Adaoz. O lec'hienn internet : www.adaoz-recyclerie-malansac-bzh.fr

mañ, dre sinañ d'Ar Gouloù Gwenn ur chekenn skoazell a 500 € Grataat a reomp eus an notenn-mañ evit ho kelaouiñ e vo aozet kentelioù brezhonek ganto adal miz Gwengolo 2021. Ur c'heloù mat eo evit korn-bro Malañseg pa gounaomp diskar skol Diwan Kistriberzh daou vloaz zo ha diwezh ar c'hentelioù brezhonek evit an dud deuet dre-eno. Gallout a raio pep hini lakaat e anv en ur vont e darempred gant Adaoz (da adkavout aes war ar genrouedad internet). Grit bruderezh en-dro deoc'h, mar anavezit deskarded war ar brezhoneg ! Live ar c'hentelioù a vo evit an deraouidi ha tud-etre o deus kroget da zeskiñ seulabred.



Tepod Mab Kerlevenez (e-kreiz)

o resev ar chekenn skoazell a-berzh renerien Adaoz.

“Bez’ e oa hon amkan¹¹ ober ma tlezhfe Trump e holl gargoù, ne vern dre be hent”. Se zo ur frazenn, laosket dre zievezh, gant Charlie Chester, rener kalvezel ar CNN, d'ur vaouez ezel ur gevredigezh a stourm a-enep an tarwazerezh¹² er gwask er Stadoù Unanet, e kerzh un emziviz ganti. Bez’ en deus lavaret ivez en doa CNN graet galv da vezeion evit diskleriañ en doa ar prezidant republikan kudennoù nervoniel. Diaes eo bremañ lavarout ez eo bet Joe Biden dilennet en un doare demokratel rik, seul vui ma ‘z eo bet lavaret traoù heñvel gant kelaouennoù amerikan all, evel ar *Washington Post*, mar ne fazian ket.

Woke ha **wokisme** : setu gerioù a lenner muioc'h-mui er c'helaouennoù gallek, met o vezañ ma ‘z on bepred c'hoantous da c'houzout dik ster ar gerioù nevez a implijan, ha ne ‘m eus kavet betek-henn displegadur resis ebet er pennadoù em eus lennet hag a gomze eus *woke* ha *wokisme*, em eus goulennet ouzh va mab, o soñjal e ouie an dra-se, met respontet en deus din ne ouie ket, ne oa ket dedennet gant se, hag

¹¹ Amkan : *objectif*, but.

¹² Tarwazerezh : *corruption*.

en doa traoù all da ober. Ha setu ma kavan e-barzh VA niv. 4418, 29 Gouhere 2021, p 5, kinnig ul levr gant Pierre Valentin *L'Idéologie woke, anatomie du wokisme*, ma vez roet en ur frazenn verr ar pezh a glasken : Bez' e talvez bezañ *woke* bezañ "*dihunet*", war "*evezh*", ouzh an direizhderioù a c'houzañv ar minorelezhioù er broioù kornogat. Sklaer e oa, hogen, soñjet em eus diouzhtu, o vezañ m'he deus ar gealiadurezh *woke* treuzet seulabred ar

Meurvor Atlantel, hag emañ o kregiñ da ober he reuz e Bro-C'hall ma 'zeus minorelezhioù e-leizh enni, n'emañ ket ar gudenn er gealiadurezh hogen er minorelezhioù o-unan, rak en ur vro ma ne vije ket diouto ne vefe ket da zoujañ kalz a draoù diouzh he ferzh. Gant ar Republik c'hall avat, gant he hollvedelezh diarc'het, hag a fell dezhi ober Gallaoued eus n'eus forzh pe treuztiriad o tont eus penn all ar bed, n'eo ket an degouezh hag ez eus sach-blev da c'hortoz.

Kanaouenn an niverenn

Kan ar soudard

(*Troidigezh kan broadel Iwerzhon*
«*The Soldier's Song*»,
gant *Tepod Mab Kerlevenez*)

Poz kentañ :

Ganeomp 'vez ur c'han, kan ar soudard
Kalonek ha kadarn bepred
Ha pa vezomp bodet adarre
E kambr ar stered skedus
Mall warnomp gwelout an emgann
Pa c'hortozomp gouloù an deiz
Amañ e didrouzder an noz
E kanomp-ni kan ar soudard !

Diskan :

Ni zo soudarded,
Da Iwerzhon ez omp gouestlet
Darn zo deuet
Eus ur vro en tu all d'ar mor
Touet hon eus bout dieub,
En hor bro gozh hiviziken
Ne vo mui plas d'an tirant pe d'ar sklav

Fnoz, ez aimp laouen d'an talbenn
'Vit ar vro betek hor marv
'Kreiz trouz 'r fuzuilhoù,
'Dan ar boledoù
E kanimp-ni kan ar soudard !

- II -

En draoñienn c'hlas pe e bod ar menez
O doa gwechall stourmet hon tadoù
Ha trec'h e oa bet ar memes banniel
A blav lorc'hus a-us deomp
Bugale ur ouenn stourmerien
N'eo bet biskoazh dizenoret
Ha pa gerzhomp da vont d'an enebour
E kanomp-ni kan ar soudard

- III -

Mibien ouezelek, paotred ar vro !
An deiz gortozet zo o tont
Hor renkoù startaet dre an enez
A ray d'an enebour krenañ
Bihanaat 'ra tantadoù hor c'hampoù
Sellit ouzh ar sked arc'hantet
Eno e c'hortoz an enebour saoz
Neuze kanit kan ar soudard !

Mererezh :

20 € eo ar skodenn a ro ar gwir da resev *Ar Gouloù Gwenn*. Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **Ar Gouloù Gwenn** da : Ar Gouloù Gwenn 10 Plasenn ar Republik 56400 An ALRE

Skridaozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr, pe dre ar Post da rener Ar Gouloù Gwenn : Yann MIKAEL, 368, straed Chapel Prad-Koulm 29250 PLOUGOULM. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Ar Gouloù Gwenn**, c/o Tepod Mab Kerlevenez – 10 Plasenn ar Republik 56400 An ALRE - ISSN : 2677- 5271